

## KIS-529 – Br. alvez, beved, buhez

(MME da GE – 05 03 97)

Graet ho poa gant Br. **meinenn** b. -où evit Gl. *minéral*. Ha tu a ve din da c'houzout perak ho poa deveret diwar *mein-* ha neket diwar *maen-* evel m'ho poa graet evit *karregad* ha neket *kerregad* ?

Distreiñ a ran gant **meinenn**. Da vezañ termenet evel-mañ : "nep korf anorganek zo en douar pe war e c'horre" (cf. *Robert*).

Ha mat eo ober gant **anorganek** pe gwell e ve ober gant **divuhez** ?

(GE da MME – 12 03 97)

An evezh a dennez war an div stirann *maen-* ha *mein-* a gaver en deveradoù. Luniet eo bet ar re-mañ e bloaziadoù disheñvel evit diskiblezhioù disheñvel hep damantiñ betek re d'an unvanded. A-fet poell ar yezh ez eus arguzennoù a-du gant an eil hag eben. Kosteziñ a ra an arverioù hiziv gant *mein-* mar barnan diwar embannadur kentañ *Geriadur Brezhoneg* hag al LAVARoù diwezhañ.

Goulenn a rez : **anorganek** pe **divuhez** ? Respont a ran : nag an eil nag egile. Met dav spisaat ar sternioù dezevout da gentañ. Arabat dreist-holl fiziout war ar galleg, yezh a voe stabiliet a-geñver gant ur stad distremenet eus ar sevenadur ha na gaver enni nemet kalfichadurioù en domani-mañ eus ar preder. Hiziv e renker ergorennoù an anaout hervez teir urzh :

I. — An **alvez** (Gl. *phénomènes physiques, monde physique, gwechall : nature*), hollad an anadennoù a reer meiz warno dre ar *saveleñoù*. Hollad skiantoù an alvez (Fizik, Kimiezh, h.a.) a reer anezhañ an *Alvezoniezh* (Gl. *sciences physiques, gwechall : sciences de la nature, sciences naturelles, physique*). Domani ar Ouezoniezh er ster strizh eo, pa gemer ar saveleñoù furm ur Jedoniezh, gwell : ur Vezoniezh.

II. — Ar **beved** (Gl. *phénomènes vitaux, vie animale, vie biologique, vie organique, (le) biologique, (l')organique, (l')organisé*), hollad an anadennoù a reer meiz warno dre an *eul* [an termen-mañ n'en deus kevatal strizh e yezh all ebet ; e galleg e kaver a-dal dezhañ ur ster arbennik eus “ *sens* ” : n'eus anadenn vevedel na ve un anadenn alvezel war un dro, ar c'hemm o vezañ en un drevn andireadus d'ar saveleannoù (an eul e vez kenurzhiet drezañ ar beved) ; hiroc'h war gement-se war *Emsav* ha *Preder* ]. Hollad skiantoù ar beved eo ar **Vevoniezh** (Gl. *Biologie, sciences du vivant, science des êtres vivants*, gwechall hag evit aozerion 'zo : *sciences de la nature, sciences naturelles*). Dav eo menegiñ diac'hinad gouiziadoniel (Gl. *paradoxe épistémologique*) ar c'heñverioù etre an Alvezoniezh hag ar Vevoniezh : diouzh un tu, toleadoù a-bezh eus ar Vevoniezh a gouezh en Alvezoniezh, hiziv da skouer gant ar Vevoniezh volekuler diorreet bennozh d'ar Stlenneg ; diouzh an tu all, e tizoloer harzoù da Bennaenn ar saveleannoù en Alvezoniezh, e domani ar C'horrfizik pergen (sl. KIS-515, La-11, pp. 39-52).

III. — Ar **vuhez** (Gl. *vie humaine, vie morale, vie spirituelle*), hollad erzerc'hadennoù an emouezañ, al lavar, ar rezid, an divezelezh, an istor, h.a. a reer meiz warno dre ar *ster* (evit ur wech ez eo prizius ar gerdarzh : *ster* hag *istor* zo a undarzh e brezhoneg). An diskiblezhioù o studiañ ar vuhez a c'haller gervel “ skiantoù ”, fazi e ve ober anezho “ gouezoniezh ” (e galleg e talvez *science* evit pep furm gouzout hentennek ; e brezhoneg ez eo gwell mirout *gouezoniezh* evit ar skiantoù a zo ar Jedoniezh o lavar ha lezel gant *skiant* an erdal ledan). Ober a c'haller gant Br. **Buhezonezh** evit studi ar vuhez — ha n'eo ket evit studi ar beved evel ma ra Roparz Hemon gant an diantekañ spered krennamzeriek ! (Gl. *sciences de l'homme, sciences humaines, sciences morales, sciences de l'esprit, Al. Geisteswissenschaften*).

Chañs ar brezhoneg eo kemer e lañs war un dro gant ur c'hammed nevez eus ar preder ; un druez e ve koll amzer o klask devezout evel ma raed 50 vloaz 'zo, seul gent a se 500 vloaz 'zo.

Evit dont da'z aters, e galleg e welan termenet *minéral* evel “ constitué de matière non vivante ”, pezh a zo amoet rak ar “ matière vivante ” a vez amparet kant dre gant gant “ matière minérale ”. War seurt despizadurioù ez adkaver mesk ar preder krai a rene gwechall dre ar skiantoù — ha nad eo ket peursteuziet c'hoazh. An despizadur kevazas hiziv eo : "an danvez diouzh ar sell alvezel". Er yezh voutin hag e domanioù skiantel ha kalvezel ma anver an danvezioù diwar al lec'h m'o eztenner, ez eo Br. **meinel** a zere : **kimiezh veinel** pe **meingimiezh** ; ha n'eus skoilh ebet ouzh astenn e arver d'an devezout rik, o c'houzout koulskoude e vez gwell e degouezhioù 'zo ober gant **alvezel**. Graet ez eus bet gant *organek, anorganek*. Gwell dilezel an

termenoù-se plaket diwar ar galleg pa burchas ar brezhoneg termenoù eeunoc'h ha diforc'hell : e galleg e talvez *organique* a) "a-zivout ar bevion", b) "a-zivout ar c'harbon", sk. : *chimie organique* e kemm ouzh *chimie biologique* pe *biochimie* ; e brezhoneg e lavarer **meinel**, **bevel**, **meingimiezh**, **karbongimiezh**, **bevgimiezh**. Gl. *anorganique* zo a-dal da Br. **anvevel**.